

KLEUZIOÙ HON BRO

« Ne gavan tamm ebet plijus gwelout kleuzioù va Bro / - Framm ha stern ar Broioù Kelt, - / Razhet didruez ha diskiant », a skrive Añjela Duval e 1967. Herie an dez e skrivfe kemend-all, marteze gant un tamm spi bennak en he gerioù ?

Treger hon bugaleaj zo cheñchet penn da benn : an doare da labourat an douar, gwir, met ivez ha marteze muioc'h c'hoazh an doare da vevañ, pe e vefemp war ar maez pe en kreiz kêrioù pe bourkoù bihan. An holl ac'hanomp, bras ha munut, hon eus gwelet penaos zo bet diskaret, razhet kilometradoù a gleuzioù. Da belec'h eo aet an argaeannoù, baradoz an evned, an amprevaned, ar bleuñv, met ivez... hini ar vugale a ouie lampat war ar c'hleuzioù ha redek a ode park da ode park, evel-se. Lod a bike kalzik, pan oa afer ouzh ar spern-du plantet enne ! Ar re gozh, avat, a ouie dastum an ili-dant d'o lakaat en alkool, dezhe da deurel blaz ar c'hleuzioù dezhañ !

An argaeannoù a veze plantet ivez war ar mogergleuzioù : pan daoler pled e weler un toullad anezhe un tammig e pep lec'h. Kit da welet en tu Pouldouran pe ar Vinic'hi, etre reoù all ar reoù zo bet adkempennet pe adplantet gant an dud, diwar alioù ha skiant-prenet Saig Jestin.

Met en tu all d'an hiraezh ha da gaerded ar c'hleuzioù e ranker kompren da betra servijont. Saig Jestin en devoa skrivet tout se plaen ha sklaer (p. 8) : « ar c'hleuzioù a sikour da buraat an dour, a gas an dour d'ar mammennoù ha d'ar poullennadoù-dour-puñs, a vir ouzh an douar da vont gant an dour-glav, a ziwall na vefe beuzet hor c'hêrioù hag hon hentoù, a chell stankañ ouzh ur saotradur lec'hel (hañvouez da skouer), a gaera ar gwel, a harz kalz gwelloc'h ouzh an avel evit n'eus forzh peseurt post betoñs gant orjal-dreinek, a ro bod da loened ha da blant a bep seurt, ret-holl evit kempouez an natur. »

Lâret a rafen ouzhpenn eo ar c'hleuzioù ur gwir arm da stourm a-enep ar goumon, ar bezhin glas. Ar c'hleuzioù zo evel gwazhied ur c'horf anvet natur : lakaat a reont da redek gwad yac'h evit al loened, an dud, ar plant, ar bleuñv. Miret a reont ouzh al loustoni d'en em strewiñ en un doare diboell.

Met bremañ e kavan gwelloc'h leuskel Añjela Duval da gomz a-dreuz he barzhoneg Diskar ar c'hleuzioù :

- Bleunioù dister. Bleunioù tener,
Bleunioù savet war ar girzhier,
Diwanet a-grap ar c'hleuzioù
Hag e leton ar gwrimennoù.

Bleunioù koant an nevez-amzer,
Hollwisket gant livioù seder,
Bleuñv gwenn ha glas, ha ruz, ha roz,
Ha melen 'vel stered an noz.

Pe Vro 'n devo ouzhoc'h truez ?
E pe Vro 'reot hoc'h annez ?
Pa ne vo mui ha garzh na kleuz.
'Mañ maezioù Breizh o koll o neuz !

Nann, n'eo mui Breizh, Tir ar Gelted !

Ha pelec'h 'neizho an Evned ?

Diskaret, devet ar gwez kozh.
Lakaet an tan el lann, er roz !
Mui a ograoù d'an avel yud...
Piv 'gano c'hoazh er blaenenn vut ?

- 'Vo mui na kan, na frond, na bleuñv,
Na mui disheol 'koste ar c'hleuz.
Ha pelec'h 'ta ray ar c'hozhiad
Un diskuizh hag ur c'hornedad ?
Goudor ebet ouzh ar reklom,
Brizheol ebet 'kreiz an hañv tomm
Na danvez mel d'ar wenanenn,
Na plas d'e guzhat er gleuzenn.

Hag ar frouezh gouez, va bugale,
Echu 'vo dezho hep dale :
Kistin, kraoñ-kelvez, mouar-du,
Koper, irin, lus ha babu...

Ha pelec'h 'kavo ar gwrac'hed
Louzaouennoù da aozañ tret ?

- O yaouankiz diskiant
O trok Levenez 'vit arc'hant
Selaouit klemm ar c'hleuzioù kozh
O pet truez ouzh ho Pro gozh
Ouzh labour sakr ho Tadoù-kozh.
(C'hwevrer 1967 ; Kan an Douar, pp. 169-170 ; © Kuzul ar Brezhoneg)

N'hallan ket miret a soñjal eo heñvel tonkad hon c'hleuzioù ha hini hon yezh : er memes ekosistem emaint. Emaint dindan ar memes avelioù-tourmant, gant efedoù drastus heñvel : razhet, dismantret, touzet... Emaint ivez dindan ar memes youl da vezañ n'eo ket miret hepken, met kresket, kaeraet... bleunioù ar mogergleuzioù ha bleunioù ar yezh zo ken kaer an eil re hag ar re all. Ar memes aezhenn en em sil en argaeennoù hag en hon skouarnioù laouen. Gant ar frouezh e farder peadra da vezevenniñ penn an dud, gant ar geriennoù e farder barzhoniezh da vezevenniñ spered ar re vras hag ar re vunut !

Herve Bihan

Levrlennadurezh
Saig Jestin, Skol ar c'hleuzioù – Hent ar c'hleuzioù, 1994.
Añjela Duval, Kan an Douar, Al Liamm, 1973.
Añjela Duval, Traoñ an Dour – Barzhonegoù, Al Liamm, 1982.

Skol ar C'hleuzioù :
<https://talus-bretagne.org/presentation-de-lassociation/>

Sevel kleuzioù nevez e bro Lannuon :
https://actu.fr/bretagne/lannion_22113/autour-de-lannion-475-000e-pour-creer-39-kilometres-de-talus-et-de-haies_60511546.html

Fañch Jestin :
https://lannion-perros.maville.com/actu/actudet_-la-roche-jaudy.-fanch-jestin-le-specialiste-des-talus-du-tregor_-4551227_actu.Htm

<https://www.nhu.bzh/en-bretagne-le-remembrement-a-detruit-nos-talus-et-notre-langue/>

<https://www.ouest-france.fr/bretagne/saint-brieuc-22000/on-detruit-le-patrimoine-des-talus-en-silence-un-gouter-pour-se-faire-entendre-le-14-juin-dcd15952-0556-11ee-ba1e-f829400390d5>

<https://www.ina.fr/ina-eclaire-actu/1971-les-bretons-alertent-sur-les-dangers-de-la-disparition-des-haies>

https://www.lemonde.fr/planete/article/2019/05/03/apres-des-decennies-de-remembrement-la-bretagne-mise-de-nouveau-sur-son-bocage_5457602_3244.html

<https://splann.org/enquete/bocage/>

